



# KIMIAD

## EUN DEN IAOUANK

Euz a barous Tregrom

Ton : *Kimiadou ar Gard Mobil.*

Tostaït habitantet a bep sort kalite  
Da glevet eur c'himiad trist, kompozet a neve,  
Zo groet d'ar voerset iaouank pere ha ra parti  
Deus eil klast ar gard mobil hag a renk kimiadi.

Partied ar voerset iaouank deus a barous Tregrom ;  
Bale a rent kalonek entrezek lannhuon,  
Kana rent enn eur vonet eur c'himiad, meubet kruel,  
A oa gret goec'hal da botret Gurunhuel.

Kri eo ar galon ma na den da welan  
O klevet o kimiadi ar gard mobil kentan ;  
Tristoc'h vo c'hoas goude pa voelfet o partiadon,  
Eil klast ar gard mobil : ho kalon ha dle ranna !

Pa voelan ar vamm baour o welan, o teplori,  
Ebarz en ilis santel, dirag ar Werc'hez Vari,  
Ha hi o pedi kalonek da obteni exit-he  
Ma retornjent c'hoas d'ar guer eur veac'h enn bue.

Ma c'halon zo glac'haret pa lenna-me ar c'heloïon,  
Ma daoulagad a zo beuet en eur mor a daerou,  
Pa renkan kimiadi ha monet deus ar guer,  
Pa laret deze kenavo evit eur pennat amzer.

Kenavo ma zi milin, euzet barz enn draouien,  
Plassenno braou oar bere buguel e c'hoarienn,  
Gouen huel caer bouddenek enn disheol a bere,  
Epad tomder ann anvou, meus kousket da greisde.

Kenavo, beleien 'r barous, surtout 'nn otrou Hello,  
C'hui a c'heus labouret kals evit hon c'has d'ann envo,  
Na c'heus ket espergnet ho poan nag en de nag en noz.  
Ar bonheur zouetan dec'h euz a c'hloar ar barados.

Kenavo beret ar barous, douarou biniguët,  
Enn pelec'h e moa desseign da vean interet.  
Deiz goel ann anaoun klemmus, ni mui voar ar beziou  
En pelec'h e repos ma zud goude ma c'hint marou.

Kenavo dec'h ma mignonet deus a barous Tregrom,  
Me a deu da guimiadi gant glac'har em c'halon,  
Ped gouec'h omp n'eun divertisset, goude ann ofisou,  
Da c'hoari eur barti c'hartou pe eur barti voulou.

Kenavo, tud ancien, gant ma c'halor glac'haret,  
Da harpa ho kosni nimp a oa destinet ;  
Mez eur lezen a zo deut abeurs ministr ar brezel,  
Hac a renkomp ho kuitad pa voar deut d'hon guervel.

Ar Republik a zo breman a neus gourc'hemenet  
Ma vezo exerset ann oll sitoyanet,  
A dalek ugent-vla, da vania ann armou,  
Betek tri-ugent vla, evit difen hon bro.

Zavet a zo breman tremen eiz kant nil den  
Hag a guita ive ho bro gant glac'har hag anken,  
Evit en eur difen euz ar Brussianet,  
A neus c'hoant da exersi voarnomp ho c'hrueldet.

Otrou Doue, ma guir vestr, guir roue ann envo,  
Heman a zo din c'hirvoud, glac'har bras ha kanvo,  
Pa renkan me dilezel ma bro ha ma ligne  
Hag ambandoni oll ha monet d'ann arme.

Aman e teuan da invoki Tad ar spercjou-map  
De arreti ann daero a zo em daoulagad ;  
O Majeste infini ! kurunen ann oll zent !  
Deut eta, me ho supli, da gonzoli ma c'herent.

O majeste infui ! roue ann oll elez !

Diskennet voar ma c'herent eur zel a drugare ;

Deut eta, me ho supli, deuet d'ho c'honzoli,

O renkout kimiadi diwi-me ra deze glac'hari.

Kenavo eta, ma breur paour, kenavo evit mad,

Birviken na skuelo ken eta ma daoulagad ;

Goude beau da brenet digant ar gouarnamant,

E renkes hon abandonni ha mont warlerc'h da arc'hant

Itron-Varia Rozera, eil batronez Tregrom,

Me a deu d'ho suplian, deus a greiz ma c'halon,

Da gonzoli ma mamm baour ebars enn he c'hosni.

Renkout kimiadi d'he mab, pebeuz glac'har evit-hi.

N'em gonzolit, ma mamm baour ha c'hui ma c'hoarezet,

N'imp retorno c'hoas d'ar ger, gant hon drapo loreet,

Goneet ganimp ar viktoar war hon inimiet :

Birviken gant roue Pruss na vemp-ni kommandet.

Deut eo ar Brussianet war douar ar Fransizien,

Graet ho deus kals ha ravach, an dra-ze zo serten ;

Ravajet ann douarou, gret o deus fallente !

Ar gard mobil ha bromet e pefont quer ann treo-ze.

N'imp a ha a galon vad 'vit difen hon bro

Hag a bromet he difen, ia, betek ar maro ;

Ouel eo ganimp-ni mervel mil guech war ar blenen

Evit rei da roue Pruss hon fusuil, hon zabren.

N'imp na refomp ket 'vel ann Napoleon,

Zo n'em rentet prisonnier c'hanvel ouz eur poultron ;

Prisonniet so gantan tremen daou-ugent mil den...

Roet he zabren deus he zorn, ambandonet ar Fransizien

Kenavo, ma muia karet, ma doussik koant Jeann-Mari

Eur blaneden diremet a deu d'hon separi ;

Plijadur hag eurusdet n'eur momet zo tremenet :

A boan ec'h eo dimp-ni bean n'eum anaveet.

Eur chaden a moamb formet dimeus ann amitie

Hag ec'h eo red e zorri ha monet d'ann arme.

Kenavo 'ta, ma c'harante, 'nn hini garen ar muia,

Pa zonzan en kement-se, ma c'halon a ven ranna.

O kalon a garante, kenavo, dit a laran,  
Biscoas poan na meus santet a ve par da c'homan :  
Echu eo ma c'halon, ma nerz ha ma c'hourach...  
Bremen eur voulet pruss ha mo evit partach.

Arri eo, sivoas ! ann heur, red eo n'eur separi...  
O Doue ! pebeus glac'har ! pebeus melankoni !  
Adieu eta, ma c'harante, me lavar dit kenavo,  
Er bed-ma, da virviken, Doue d'ho konduo.

Me a garfe kad ar remet a dousafe ma glac'har ;  
Evidon eo achu plijaduriou ann douar,  
Plijaduriou ann natur zo achu evidon,  
Kenavo d'am iaouankis deus a Kernoteriou.

Ar c'himiad-man zo gret, gant kals a nec'hamant,  
En eun amzer a drubuil, gant eur miliner iaouank,  
A neus hi kompozet, ken mont er mez deus he vro,  
Hag a c'houlen diganec'h eun neubeut a bedenou.



FIN.